

EN ANJELUS

Didostait kristenien pere n'he gar Doué
 Laket n'ho kalonow or hantig e drué

Laret ho anjelus peta ter gwej bemdé
 D'en noz ha d'er vintin, ha d'en eur e greisté

Laret ho anjelus d'en eur e gariet
 Doué in skrivo dac'h evelde e lariet

Er hentan tapen oed oe bed skwiyet mab Jezus
 E oe pe oe Mari laret hi anjelus

E oe pe oe Mari in kamb er Nazareth
 War bennow hi dowlin laret hi chapeled

Krino ra 'n iwerniou, spont e ra 'n oll diowled
 Klew er zon en anjelus war lerc'h en owern bred.

(Dastumet gant Yann-Fafich KEMENER, 'ba Jint Ijo)